

# GUERZ

*Aur sujet eun Den Yaouang a voa deut da baez  
pêvar snoët goude e varo.*

*S*PERET-SANTEL, m'o ped, anflamit va speret,  
Da gana eur c'hantic evit ar Vretonet,  
Var sujet eun exempl trist pehini zo éruet  
Ebars en Breiz-Izel, e mis Du tremenet.

Crena ra va c'halon ive va oll memprou,  
Va daoulagad ne reont nemet scülla daelou,  
O tont da gonsideri peguer trist è ar matier:  
Goulen a rân sicour eus ar Verc'hez santel.

Eunden yaouanc, sivoas, voan'em abandonet,  
Goude ma voe maroe dud gant ar c'hlénved,  
A voan'em abandonet da bepseurt tristidiguez,  
Dabep tristidiguez, dabep seurt paourenteuz.

Evel ma voa yaouanc, ne grede clasq netra:  
Tud vad, dre charite, a gass tamou deza;  
Hac evel ma voa yaouanc e teujot d'er scandalat  
Pa na gare sevel ha mont da labourat.

Souffr a ra mil injur gant güir baciantet,  
O laqat e fizianç er Verc'hez beniguet,  
Dre m'en devoa e imach hac hini ar Bassion,  
Ha ma rè diraze bemdez e orëson.

Un den eus ar c'hontre, un den eus ar c'harti  
A deuas d'e velet, o clêvet e vizer,  
En eur larat deàn : deus d'am zi da labourat  
Ar c'hèz a respondas : ne meus qet a zillad.

Gouzout a rân certen labourat an douar ;  
Mes allas ! eme'r paour, ne meus na pal na ma  
Pêvar scoët a vancfe din evit en em eqipa ;  
Me a yêlo d'ho ti sur evit ho paea.

An ozac'h var ar guer a ro ar pêvar scoët,  
O lavarat deàn : Va mignon, ne vanq qet,  
En eur lavarat deàn : deus d'am zi da labourat  
Pa po bet pal ha mar ha prenet da zillat.

Monet a ra d'e di, ma voe eur pennad mad ;  
Plijout a rê dese certen da labourat ;  
Un devez dreist ar re all e voe meurbet estonet  
O sònjal er paour-qêz pelec'h e voa chomet.  
Ma ejont ta da velet, bac e voe cavet maro  
Ebars en e lochic, var eun dornad colo.

Lienet voe e gorf vit bea entêret ;  
Ar brud a zavas prest, ma teujot d'e velet.  
An den-mâ' deuas ive evel m'oa eus ar c'hanton,  
A deuas d'e velet... O Doue pez eston !

Pa zorti eus an ti, d'an oll e lavare :  
Orato birviqen e ene ne antre  
En Barados, un Doue, qen en devezo paeet  
Ar pez a rois deàn n'eus qet pell pêvar scoët.

Dre ar c'homzou terrupl pere a brononças,  
N'oun penos an douar d'e lònqa ne zigoras,  
Oc'h arréti eun ene a voa o vont d'ar joayou,  
A vije recevet gant Jesus en eëvou.

Ar Verc'hez beniguet, dre ma voa dëi fidel,  
A accord eur mennad evit he zervicher,  
Matteuje var an douar eun instant da labourat,  
Evit monet d'an ti da baea ar barbar.

Monet a ra d'e di, ha ma voe recevet  
Goulen a ra labour, ma voe deàn roet;  
Labourat a ra er parq qement hac an tri güella,  
Ar pez zo estonus, hep débri nac eva.

Pa zeu coulz ar repas, caér e vije'r pedi  
Evit monet gante assambles da zëbri,  
En em denne a geste, hac eno var e c'hinou  
En em strinq d'an daoulin evit souffr e boaniou.

Dont a ra'nuzuiller, qemer a ra eston,  
Hac én monet ractal da laret d'ar Person  
En devoa eul labourer hac a ré qement ha tri,  
Ar pez zo estonus, hep eva na débri.

Ma, eme ar Person, cuntunuit bepret;  
Bremâ zouden vatant me yélo d'e velet.  
Mes pa êruas er parq, dre bermision Doue,  
Ec'h anaveas pront penos voa eun ene.

Me cònjur, eme'r Person, lavar din me a ped,  
Né qet hirio eiz de em boa da entêret?  
Petra a zefot dide? petra a glasques amâ?  
Petra a zefot did evit da zelivra?

Pêvar scoët am boabet digant mestran ti-mâ,  
On deut dre vouir voyen sur evit o faea :  
Oh ! e leac'h pêvar scoët, eiz certen a vo roet,  
Eur veach, ene paour, qen a vi delivret.

Nemeus qet ar pouvoar da antren er joayou,  
Nemet gant va Æl-mat e clêfen ar c'hêlou ;  
Pedit Doue evidòn, me a ya prest d'an êvou :  
Varc'hoas d'armemes heur me rento ar c'hêlou.

Dont a ra ar Person da zigass an arc'hant,  
Ma vije delivret a boan hac a dourmant.  
Mes me, eme an ene, am boa int bet digantân :  
P'oc'h eus ar vadelez, me o rento deàn.

Pa astennas e zorn da guemer an arc'hant,  
E santas an ardor, ar boan hac an tourmant ;  
Evrec'h deobetec escoa en instant a voe dévet,  
An arc'hant eus e zorn d'an douar zo quêet.  
Adieu, autrou Person me ya bremâ d'ar joayou,  
Me bedo evidoc'h Jesus-Christ, hon Autrou.

Padleo un den dêc'h, pa yêl eus ar bed-mâ,  
Elec'h dezirout drouc, pedit Doue gantâ :  
Pedomp bepret ha meulomp ma zayo da repos  
Ha da veuli Doue en gloar ar Barados.

FIN.



# GUERZ AR GARNEL.

DEMP d'ar Garnel, Christenien, güelomp ar Religou  
Eus hor breudeur, c'hoarezet, hon tadou h̄ mamou,  
Demeus hon amezeyen, hor brassa mignonet,  
Güelomp ar stat truezus e pini int rentet.

Güelet e reot aneze torret ha bruzuet,  
Ha memes an darnvia a zo e poultr rentet :  
Ne veler mui o noblanç, o danvez, o guenet,  
Ar maro hac an douar o deus o distrujet.

Ar paour hac ar pinvidic, ar mestr hac ar sujet,  
Oll e zint rentet hénvel, oll dizenvelebet ;  
Ne zeus mui nemet esqern, poultr ha breinadurez,  
Dign eus a gompassion hac eus a bep truez.

Hoguen er stat truezus e pini int rentet,  
E parlantont e langach mud elocant meurbet  
Ouz peb-unan ac hanomp, mar qeromp profita  
Qeit ma plijo gant Doue hon lezel er bed-mâ.

Glêvit eta anezo, ha grit attantion,  
En dezir da brofita eus a greiz ho calon :  
Lavarat a r̄in deoc'h e zint het er bed-mâ,  
Ilac e varyfot evelto pa sönjot nebeuta.

Ni zobet var an douar o rën qercoulz hac'houi  
O parlant hac o vale , oc'h eva , o têbri ,  
Ha cetu amâ bremâ ar stat ma zomp rentet ,  
Goude m'omp bet en douar o vezur ar préaved.

M'oa un den crén hagalant , ha me un dijentil ,  
Me voa un den pinvidic , ha me un den habil ;  
Me meus collet va noblanç , ha me va oll danvez ,  
Me va nerz hava guenet , ha me va güizieguez .

N'hon eus cavet er bed-mâ nemet hon œuvrou mad  
Da bresanti d'or Barner , d'hon Roue ha d'hon Tao ;  
List eta madou'n douar , detestit ar viçou .  
Hac ornit mad hoc'h ene a bep seurt vertuziou .

Margoulen nit diganemp pelêc'h èt hon eneou .  
Ni resproto : d'arpurgator , rac honnes è hor brô ;  
E maint en'tân o têvi vit peur-baea o dle  
Contractet var an douar da justiç un Doue .

Eus a ouelet ar flamou ne cessont o criail ,  
O c'houlen hor pedennou , ma ellint sortial  
Eus ar prisoniou teval e pere int tolet ;  
Hastit , hastit d'hor zicour , ha na zaleit qet .

Déc'h-hu en em adressomp , querent a mignonet ,  
Da gaout memor ac'hano mp pa zit dre ar vêret ,  
Lavarit en eur dremen : Doue ra bardono  
D'an auaon er purgator , rac ennes è hor brô .

Un aluzen , ur beden grêt gant devotion ;  
Ur yun pe un oferen , pe ur gommunion ,  
A ell caiz hor soulaji ha berrât hor poanniou ,  
Hac hon tenn en un instant a ouelet ar flamou .

C'houi, Béleyen charitabl en eus hor c'hunduet,  
En hent hor zilvidiguez, pa edomp var ar bed,  
Cuntinuit c'hoas un nebeut da gaout truez ouzomp,  
Oc'h ober, dre drugare, œuvrou mad evidomp.

Ispicial bo pedomp pa deuit da celebri  
An Oferen en ilis, clèvit neuze hor c'bri  
Eus a ouelet ar flammou o c'houlen diganeoc'h  
Ma leuot d'ober gant Doue dre'r Sacrifiç hor peoc'h.  
Ha p'or bezo peur-baeet ar boan dleet d'hor pec'het,  
Ni hor bezo dèc'h neuze digant Doue reget.  
Pedit, ni a rai ive ; en em sicouromp oll,  
Ennes vezoz ar voyen ne deuyo den da goll.

Evel an dour o vouga an tân-goall alumet,  
An tân eus ar Purgator a vez ive mouguet  
Dre ar Sacrifiç santel offret var an Auter,  
Da c'houlen hon delivranç ouz Doue hor Zalver.

Pazorti an eol squeudus a zindan ar gouabren,  
Ar bed oll en un instant a receo sclêrijen :  
Ni a zortio ive sclér evel ar stered  
Eus ar poaniou a zouffromp dre'r Sacrifiç offret.

Adieu, tadou ha mamou, breudeur ha c'hoarezed ;  
Adieu, qerent, mignonet; adieu dèc'h, tud ar bed :  
Ni a ra bremâ dèc'h hor c'hiadiad diveza ;  
Adieu dèc'h : qen a vo en traouyen Josapha.

Roit ar repos eternel, va Jesus, va Autrou,  
D'an oll eneou fidel pere zo er flammou,  
Ebars en ho Parados, da veuli da james  
Assamblez gant an oll Zent ha gant an oll Zèles.

Piou ac'hanomp, va Douel n'en devenus divoeret  
Un tad, ur vam, ur buguel, querent all, mignonet?  
Bisitomp-ta o beziou ha pedomp a galon :  
Un douçder an tenerra eo d'ur c'hristen güirion.

Daoulinet var o beziou, e credomp fermamant  
En ur bedi evito, int d'hor speret presant.  
Lavaromp-ta evito, gant hor Mam, an Iliis,  
Ur Miserere mei hac un *De profundis*.

DOUE RA BARDONO D'AN ANAON !

